


8N2-5-049



Kantik      SANT SEBASTIAN

Diskan - Dalc'hit d'ho feiz, tud Breiz-Izel  
Seulvui ma rer d'ezi brezel  
O klask diganeoc'h he Iemel !



-1-

Ra vo Doue en Nenv meulet  
Gant an holl sent ha sentezed  
Ra vo meulet gant an Eled !

-2-

Ra vo meulet war an douar  
Gant mouez kement hini er c'har  
Hag e peb lec'h, hag e peb mar !

-3-

Ra vo meulet Doue eleiz,  
Meulet da veza roet da Vreiz  
Da veza roet da Vreiz e feiz !

-4-

Goude Doue, ra vot meulet  
Sant Sebastian benniget  
Hor Sant patron muia karet !

-5-

Gwech all, sant bras en ho puc  
Eus peb klenvot o poa pare  
Dre ho peden ha gras Doue !

-6-

Hor sant patron, evel gwech all,  
Hirio c'hoas c'houi oar hon diwall  
Eus a bep drouk, eus a bep gwall.

-7-

Hor c'hendalc'hit dinec'h bepred  
Etouez birou an drouk-spered  
Gwassoc'h vit re ar baianned !

-8-

C'houi hon diwall eus ar c'hlenved  
Hon diwallit eus ar pec'hed  
Gwassa klenved 'zo 'bars ar bed !

-9-

C'houi pous ar garg a bers Doue  
Hag eus hor c'horf hag hon ene  
Salvit, salvit ho pugale !

-10-

En Nenv eun deiz, en ho kichen  
Mar domp salvet dre ho pedenn  
O na bletinen, 'n ho kurunenn !